

A R

BUGUFL FUR.



E MONTROULEZ,  
Eus a Imprimeri LÉDAN.

49  
4 19  
156



## DIALOG

Etre un Doctor hac ur Buguel.

*An Doctor.*

BONJOUR, Mabig : pelêc'h it-hu?

*Ar Buguel.*

Da glasq ur Mestr e zàn un tu.

*An Doctor.*

Me zo Doctor, ha mar qirit

Me raï scol déc'h, mar am pedit.

*Ar Buguel.*

Bet oun er scol gant Doctoret,  
Ha tout o c'havân borôdet,  
O clasq desqi dà beb-unan  
Ar pez ne ouzont qet o-nan.

*An Doctor.*

Petra ne oar an Doctoret?

*Ar Buguel.*

Meur a dra zo ne ouzont qet.

*An Doctor.*

Ha te a oar mui eguedo?

4

*Ar Buguel.*

Mar qirit, ni a zisputo.

*An Doctor.*

Te da zisput ouz un Doctor !

*Ar Buguel.*

Ho respont a rin gant enor ;  
Ha na oufac'h goulén netra  
Na roin rēzon dēc'h anézâ.

*An Doctor.*

Piou en deus crouet ar bed-màn ?

*Ar Buguel.*

Nep a rēr Doue anezān.

*An Doctor.*

Ha te oar petra eo Doue ?

*Ar Buguel.*

Allas ! ne oun qet , na c'houi ive ;  
Dre ar feiz deomp oïl eo desqet  
Qement a zo en deus crouet ,  
Var guement zo eo sonveren ,  
Da guement zo e courc'hemen ;  
An nep ne zentoit qet ountâ  
Ne vanq james d'o sunissa .

Ous pen ez eo universel ,  
 E c'hel tout , ez eo eternel ;  
 Mes ne oufe den expliga  
 Na renta rezon anezā.

*O altitudo ! na ellomp qen :*  
*Adoromp en hep e gompreñ.*

*An Doctor.*

Petra dle an oll da Zoue ?

*Ar Buguel.*

E zervicha cors hac ene.

*An Doctor.*

Peur na penos er servicher ?

*Ar Buguel.*

Pa ra peb-unan e zever.

*An Doctor.*

Petra eo never peb-unan ?

*Ar Buguel.*

Never an oll guitibunan.

*An Doctor.*

Petra eo never an Doctoret ?

*Ar Buguel.*

Pratiqa ar mad o deus desqet ,

Rac inutil ha coll amzer  
 Eo disqi ar mad hep e ober.

*An Doctor.*

Petra eo never ur Buguel ?

*Ar Buguel.*

Disqi beza un den s̄antel.

*An Doctor.*

Peur en em goll ur c'hrouadur ?

*Ar Buguel.*

Pa ro d'e dad displijadur.

*An Doctor.*

Petra ra dezàn mont da goll ?

*Ar Buguel.*

Beza re lezet en e rolli ?

*An Doctor.*

Pelec'h e tesquer follentez ?

*Ar Buguel.*

O henti goal compagninez.

*An Doctor.*

Piou so dangerus o henti ?

*Ar Buguel.*

Nep so sujet da sotoni.

Dibaot buguel a bent tud' sot.  
Eus o sotoni na zesq' lot.

*An Doctor.*

Piou a respont eus anezo ?

*Ar Buguel.*

Nep a so tad ha mami dezo.

*An Doctor.*

Petra eo never tad' ha mam ?

*Ar Buguel.*

Miret o bugale divlam.

*An Doctor.*

Penos ec'h ellont-y e ober ?

*Ar Buguel.*

Oc'h o suja da chom er guér :

Mar o lezont re da vale ,  
E teuint libertin hep dale.

*An Doctor.*

Peur e tleer o instrui ?

*Ar Buguel.*

Dious o speret dre ma tui.

*An Doctor.*

Peur e tleer o c'lorij? .

*Ar Buguel.*

Pa zint bian , eas dà blega.  
**F**acilloc'h eo plega planten  
**E**guet na deo plega gnezen.

*An Doctor.*

Peur e tleer o demezi ?

*Ar Buguel.*

Pa o deus oat ha fantasi.  
**G**uell eo abret demezi merc'h ,  
**E**guet na deo caout qeuz varlerch.

*An Doctor.*

**A**n tad , ar vam hac int a dle  
**O**ber stad eus o bugale ?

*Ar Buguel.*

Tad a ra stad eus e vabic ,  
**E**n desq da veza mab prodig ;  
**H**a mâm a ra stad ous he merc'h ,  
**P**euriess a ouel varlerch.

*An Doctor.*

**A**n tad , ar vam , hac int a dle  
**R**ei o zraou oll d'o bugale ?

*Ar Buguel.*

Sotoni bras ve da un den  
 Discrêgui eus tout e voyen,  
 Ha rancout goulen goude-se  
 E ezomou ous bugale.  
 Seantoc'h eo goulen oc'h tad,  
 Evit d'an tad goulen dious mah.  
 Guelet hon eus meur a exempl  
 Etouez tud cre ha tud sempl,  
 Ar vugale o caç ractal  
 Ho zad, ho mâm d'an hospital.

*An Doctor.*

Pe etre piou en tieguez  
 Ne vez nemeur a garantez ?

*Ar Buguel.*

Etre bugale ha lesvam,  
 Ispicial mar deu d'o blam,  
 Rac al lesvam ne qet caret  
 A galon vat gant minoret  
 Dibaot lesvam a gar ive  
 Bugale all qeit haec he re.

*An Doctor.*

Ha te oar micher pricdou?

*Ar Buguel.*

Clêvet emeus o doareou.

*An Doctor.*

Peur vez carante etrèse ?

*Ar Buguel.*

Pa na zeffot netra deze.

*An Doctor.*

Ha peur e vanq an unioù ?

*Ar Buguel.*

Pa vanq dezo pourvision.

*An Doctor.*

Ha peur e vezont e coler ?

*Ar Buguel.*

Pa vanq unan en e zèver.

*An Doctor.*

Piou a so cassaüs d'an oll ?

*Ar Buguel.*

Au diaoul bac ur chreg foll.

En un desert eo guel heza ,

Ha caont eno peoc'h da veva

Evit n'en deo chôm assambles ,

Gant greg ebet , mar dé folles .

*An Doctor.*

Hac ar graguez a gar/ar guin ?

*Ar Buguel.*

Eus a enor n'en dint qet dign.

Ur vreg a so custum da esa

A bep tout ne dal netra ;

Oc'h peb honestis e ser dor ,

Hac oc'h pep pec'het e tigor.

*An Doctor.*

Petra servich canna ur vreg ?

*Ar Buguel.*

Lacât he malic da redoc.

N'en deus serpent dangerussc'h ,

Leon na dragon terruploc'h

Eguet ur vreg so e coler ,

Ous e c'hanna so mil danger.

*An Doctor.*

Pelec'h e cañet-hu ur vreg vat ?

*Ar Buguel.*

D'an ên e rançer mont d'e c'herc'hat.

*An Doctor.*

Nac ar plae'het, va buguel ges,

**Ha te c'heus oute carantez ?**

*Ar Buguel.*

Va zad en deus va c'helennet  
 Ne dostaïn james ons plac'het ,  
 Rac tromplus int cals aneze ,  
 Ha collet ar bed-mâ gante.

O min a so douç eguis mel ,  
 Hac' a zeboc'h meur a vuguel ;  
 Mes ne vezet qct pell ganto  
 Eguis ar vestl na dint c'huero.

*An Doctor.*

Petra a ra da gals a dut  
 Divar o fent caout mil disput ,

*Ar Buguel.*

Petra ma zeo an dut-se sot  
 Eus a vil malheur clasq o lot.

*An Doctor.*

**Ha te ene plac'h fur ebet ;**

*Ar Buguel.*

Na meus get cals anavezet :  
 Ar plac'het fur , vor a glevan ,  
 Nerdint get commun er vro-mâñ.

*An Doctor.*

Pe da lec'h eta int-hi êt ?

*Ar Buguel.*

Elec'h n'en deus qet a voaset.  
Biscoas plac'h fur, fur na voe pell  
O henti goas na ne voe vell.

*An Doctor.*

Ha na dleer qet en em henti  
Evit caout lec'h da zimisi ?

*Ar Buguel.*

Dimisi a so permetet,  
Mes sotoni eo gemeret  
Ur plac'h e deus meur a c'halant,  
Hac eus an oll a so contant :  
Guell eo guénen caout ur mignon,  
Eguet ur plac'h en donézon.

*An Doctor.*

Ha te c'heus cals a vignonet ?

*Ar Buguel.*

Ne ansayan mignon ebet.  
Ar vignonet etis ar bed-mañ  
So inconstant, var a glévan :

Dibaot a zen a ve tromplet  
O re fizout er mignonet.

*An Doctor.*

Pegueit epad ar vignonach ?

*Ar Buguel.*

Bete'n ezom , pas davantach.  
Nep en deus arc'hant hac a ro ,  
A gueff mignonet e peh bro ;  
Mar deu ezom dezàn goude ,  
E vignonet en dizene.

*An Doctor.*

Petra ra nep a brest arc'hant  
Da ur mignon hep caout goarant

*Ar Buguel.*

C'hoant coll en deus hervez fêçon  
Hac e arc'hant hac e vignon :  
Qenderv gompes out pa bresti,  
Ha den iugrat pa c'houlenni,

*An Doctor.*

Na nep a ra un donêsôñ ,  
Petra sonch-én en e galon ?

*Ar Buguel.*

Sonjal a ra en devezo  
 Daou c'hement nui eguet na ro  
 Panevet se certenant  
 Nebeut a zen a rae presant.

*An Doctor.*

Hac én a so den e nep canton,  
 N'en deus adversour ha mignon ?

*Ar Buguel.*

Dibaot a zen a so er bed-mâ  
 N'en deus er c'har hac er c'hassâ.

*An Doctor.*

Pe dious piou e renquer tremen ?

*Ar Buguel.*

Dioc'h ar bed-oll mar be moyen  
 Rac ne deus den na ell ober  
 Ha drouc ha mat gant an amzer.

*An Doctor.*

Pellec'h e sao dissantion ?

*Ar Buguel.*

Elec'h ma varq soumission ;  
 An dut superb a sav ato  
 Un disput bevnac eticzo.

*An Doctor.*

Na pe ous pion ne renquer qet  
Caout. James disput ebet ?

*Ar Buguel.*

Ne dieer caouet gant hini ,  
Ma na ellet qet trec'hi.  
Marc'h a resist oc'h ar c'heutrou  
A ra gaou bras ous e gostou ;  
Ha sot eo den da resista  
Ous nep so croc'h legueta.

*An Doctor.*

Peuaos è fach ar vignonet,  
Na peur e vezont accordet ?

*Ar Buguel.*

Divar ar guin peur liessa,  
E existimoat en em facha;  
Ha d'o accordi goude-se  
E renquer caout' guin adare.

*An Doctor.*

Ha té car ive eva guin ?

*Ar Buguel.*

Re yaouanqie è c'hoas va min.

Gant an Doctoret el lêzàn,  
 A raï guell uzach anezàn.

*An Doctor.*

Nep zo pedet da ur banqet,  
 Ha ne qet sot ma n'en da qet?

*Ar Buguel*

Furoc'h ê calz mar chom er guer,  
 Ma na oar eva dre voder.

*An Doctor.*

Petra ra an ini ev re?

*Ar Buguel.*

Disqi d'ar bed oll e zoare.

Pa vez secret, mat bez mezo,  
 Qément a oar a lavaro,  
 Ha calz c'hoas aviziou ouspen,  
 Pa zao e vanne en e henn.  
 Ar paoura tout, evet dezàn,  
 A zo pinvidic, emezàn;  
 Ha gouscoude en en deveus poan  
 O clasq caout yot silet da goan.

*An Doctor.*

Piou a ra d'an dud guella cher?

*Ar Buguel.*

Nep en deus joa oe'b e ober.  
 Digant ur miguon eō guell caout dour  
 Evit guio digant un traitour.

*An Doctor.*

Mar ez pe arc hant , te effe guin,  
 Evit heza yaouanc da vin ;  
 Mes b'elles cfa nemet dour ,  
 Abalamour ma zout paour.

*Ar Buguel.*

Mé ne mens nac arc'hant nac acur ,  
 Ha gousconde ne deun qet paour ;  
 Pinvidic oan couls a nicon ,  
 Pa zonc contant eus ya fortun ,  
 Ha clèvet a meus e peb lec'h ,  
 Eo guell dour ha bara sec'h  
 Egant caout arc'hant leis an ty ,  
 Ma ne contant nep en deus-hy.

*An Doctor.*

Piou a zezir ha nen-deus qet ?

*Ar Buguel.*

Nep a frip ha ne chouunit qet .

Dibaot eo guelet ur prodig  
 O chom pell amzer pinvidic ;  
 Dibaot iveau ur feneant  
 A zestum calz eus a arc'hant.

*An Doctor.*

Piou zo beo hac en desse naon ?

*Ar Buguel.*

Nep a chom re bell var e scaon.

*An Doctor.*

Piou ne verit qet a sicour ?

*Ar Buguel.*

Nep a so cre ma na labour.

*An Doctor.*

Petra ê avantach ar re baour  
 Var nep en deus arc'hant hac aour ?

*Ar Buguel.*

Un avantach a so caér ;  
 N'o deus qet aon rac al laér ;  
 Rac ne veler qet al laéron  
 O vont nemeur en o c'hanton,

*An Doctor.*

Pelec'h eta e vezont hi ?

*Ar Buguel.*

Eleac'h ma santont eus ganty.

*An Doctor.*

Fiou so custum da laërez ?

*Ar Buguel.*

Nep en deus aou rac paourentez.

*An Doctor.*

Ha cresqi a ra ar voyen

O qemeret madou an estren ?

*ar Buguel.*

James den ne bînviciea

Oé'h ober g'ou oûs e nessa :

Ar madou drôuc acquisitet

Na prosperont gant den chet.

*An Doctor.*

Nac ar madou destumet pront ?

*Ar Buguel.*

Dissilla prest a gustumont.

*An Doctor.*

Hac all laëron a ell miret

N'o desse qet a boan speret ?

*Ar Buguel.*

Natur all laër eo beza lant  
 Caout aon ha spont pe za en hent,  
**E** sonch dezàn ez eus bepret  
 Ur re benac oc'h e redéc.

*An Doctor.*

Pet sourt laeron so er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

Difficil ve o nivera ;  
 Rac ma ve an oll examinet ,  
 Nebeut a zen just a gaffet ,  
 Hac ar pés am eston mya ,  
 Hac a ra poan din da sonja ,  
 Eo ma renter e pep canton  
 Enoriou d'ar brassa laeron ,  
 Hac un nombr bras a re dister  
 Dirac an oll a buuisser.

*An Doctor*

Piou a gar enor er bed-mâ ?

*Ar Buguel.*

An oll a so contant anezâ.

*An Doctor*

Piou a ra enor d'e nessa ?

*Ar Buguel*

Nep en dens carantez outâ.  
Renta enor hep carantez,  
So trahison pe traitourez.

*An Doctor.*

Peur e chench an dat faltazi?

*Ar Buguel.*

Pa gresq ar madou en o zy.  
Dibaot hini, mar deus nicnn,  
Na chench humor pa chench fortun.  
Ar fortun vras, an enoriou,  
Eus a sent a ra diaoulon.

*An Doctor.*

N'ac a re a glasq enoriou,  
O publia o vertuziou?

*Ar Buguel.*

Dibaot ar yar na goll e vi,  
O cana re gouge dezvi,  
Ha dibaot den en emi bom pat,  
Na goll e boan oc'h ober vat.

*An Doctor.*

Ha te c'heus joa eus an enor?

*Ar Buguel.*

Ne glasqan get a zivenor.

*An Doctor.*

Pe an enor pe ar madou  
Eo ar guella eus a zaou ?

*Ar Buguel.*

Guell eo brut mad da hep-hini  
Egues caout madou leis an ty.

*An Doctor.*

Hac ar bed-oll a glasq enor ?

*Ar Buguel.*

Coulz an azen hac, an doctor  
Dibaot an den, mar deus nican,  
So contant eus e fortun.

*An Doctor.*

Petra a gredes-te eus an dad  
So custum da gaout goal vrud ?

*Ar Buguel.*

Dibaot chiminal a voguet  
Nez na ve tan en oalet :  
Dibaot en deus goal resom,  
A de clouar ma na de tom.

*An Doctor.*

Pe oc'h tra e c'heus-te joa ?

*Ar Buguel.*

Ous un dra vat pa er c'havàn.

*An Doctor.*

Petra ar mat a blich dide ?

*Ar Buguel.*

Beza bepret e graç Doue.

*An Doctor.*

Ha te a c'heus c'hoarzet hiscoas ?

*Ar Buguel.*

Ne gredàñ qet emi be c'hoas.

Clévet e meus o re c'hoarzin

Na zésthimer nemet chiagrin :

**Goude c'hoarzin e teu gouela,**

**Goude c'hoari , huanada.**

*An Doctor.*

Perac ma remerquer e peh den  
Bremâ trist hac ember laouen ?

*Ar Buguel.*

Allas ! dre ar chenta pec'het ,  
D'an inconstanç omp oll sujet ;

Ha ne ell den moralamant,  
 Beza parfetamant contant ,  
 Qen a allo evit biqen  
 Possedi ar mat souveren ;  
 Rac bepret an adversite  
 So harp oc'h ar brosperite.

*An Doctor.*

Ha te oar i've petra ra  
 Ma zeus cals contant er bed-mâ ,  
 Ha cals all pere ne dint qet ,  
 Carguet a chagrin o speret ?

*Ar Buguel.*

Ar stad en eus ar c'houstianç  
 Furvuia a ra an differanc ;  
 Rac rep a vev e guir gristen ,  
 So patient en e anqen :  
 Evel Job int contant bepret ,  
 Er c'hlêvet couls hac er yec'het  
 Bepret o deveus resignanc  
 D'ar gundi eus ar Brovidanç ;  
 Mes er c'hrontrol an dut mechant  
 A souffr ato diésamant,

*An Doctor.*

Perac eta na chenchont hy ?

*Ar Buguel.*

Difficil bras eo distrei :

Cos guezen so droac da blega ,

Qent e torre eguet heüna.

Un den yaouanq da fail pa za ,

Ne vella qet evit cosa ,

Pe mar chench un draïc benac ,

Ne chencho qet a galon vat.

Ur c'hos louarn hac én dare :

Guelet ur yar c'hoas a gare :

An nep na chench a vir galon

A gar ar goal occasion.

*An Doctor.*

Me vel erfat , buguel yaouanq ,

Ne zeffot qet dit a sqiant ;

Mes lavar din pe seurt micher

A guemeri gant an amzer ?

*Ar Buguel.*

C'houi so Doctor ha den savant

Livirit din ho santiwant.

*An Doctor.*

Me false din , na zout abil ,  
Rei dit un etat difficil .

*Ar Buguel.*

Difficulte a zo partout ;  
Coit din unan dioc'h va gallout .

*An Doctor.*

Me vel erfat na gueres qet  
Nac ar groaguez , nac ar merc'het ;  
Ma o c'hares , e raes fortun  
O timisi couls a nicun ;  
Mes pa ne zint dioc'h da zivis ,  
Ret e dit beza den a ilis ;  
Ha ma qeres , en ur redec ,  
Me tesqo da veza bêlec .

*Ar Buguel.*

Eus a gñemense noun qet dign ,  
Ha ne garan qet eva guin .

*An Doctor.*

Petra vezi-de-ta , manac'h ?

*Ar Buguel.*

Aon bras emeus n am be re veac'h .

**Ar froc a so dies da zouguen ;**  
**Ha me gred ez eus meur a zen ;**  
**Ma c'hallent o sench och rochedou,**  
**A raë franqis er c'houenchoù.**

*An Doctor.*

Me vel erfat diouc'h da humeur  
 Na vezi qet na Tad na Breur ;  
 Mes mar qeres da viana ,  
 Avocat e c'hilli beza.

*Ar Buguel.*

Ma ven avocat e rançon  
 Souten ar gaou hac e zifen ,  
 Ha rei cusul da bep-hini  
 Diouz e humor ba faltasi ,  
 Pe autramant em dismegane  
 Chom hep pledi en audianç.

*An Doctor.*

Petra vizi-te ta , soudart ?

*Ar Buguel.*

Ne doun qet custum dious an art.  
**Ar Soudardet tout peurvua**  
**A zesq laeres , a zesq pilla ;**

Hounes a so un etat fall,  
Ret e clasq din ur vicher all.

*An Doctor.*

Pa na blieli etat er bed dit,  
Ret e din da gaç da Hermit.

*Ar Buguel.*

Roit eta din herimitach,  
Ne c'houlennan qet davantach;  
Rac evit chom etoues an dut,  
Emeus aon bras n'am be goal vrut.

*An Doctor.*

Pe seurt goal vrut a pezo de  
Mar bevez mad hervez Doue?

*Ar Buguel.*

Ar bed oll a so decret,  
Ha no deffe qet faziet;  
Ar Velêyen couls a re all  
A so sujet d'an teodou fall;  
Ar Venac'h paour er c'houenchoù  
Nint qet exant dious teodadou;  
Ar Priedou, ha Tad ha Mam  
A so bepret dindan o blam;

Ar groages qes hac ar merc'het  
 A so ganto disenoret ,  
 Mestr ha mæstres o tempesti ,  
 Servicher o feneanti ,  
 Tud a justiç o ruina ,  
 Ar varc'hadourien o trompla ,  
 An dut gentil o vouel-dreti ,  
 Ar baysantet o vurmuri ;  
 N'en deus itron na demesel  
 A ve exant dioc'h o zravel ;  
 Ar bed-oll so tud fall dezo ,  
 Ne chomin qet gante er vro .

*An Doctor.*

Pa c'heus aon rac an teodou fall ,  
 Me reñ dit un avis all :  
 Studi caér ha bez un doctor ,  
 Den ne doucho ous da enor .

*Ar Buguel.*

An doctoret couls ha re all  
 A so sujet d'an teodou fall ;  
 Enoret ve o c'halite ,  
 Pa n̄e yet o superbite ,

31

Hennes eo viç an dut savant,  
Caout vanite eus e sqiant.

*An Doctor.*

Va buguelic , fouetet e viot,  
Rac re liger oc'h a deot.

*Ar Buguel.*

Mar bezàn fouetet , me so sur  
Nep am foueto na vo qet fur ;  
Perac fouetta ur buguel ques ,  
Rac ma lavar ar virionez ?

*An Doctor.*

Ar virionez a so cassaüs.

*Ar Buguel.*

Ia da nep a so cablus.

Ret eo lezel nep en deus gal  
D'en em gravat ha da c'hognal,  
Nep a gundu goal vuez ,  
A vezo flêmet alies.

Parlant a rit ous fouetta ;  
Fouettit oc'h azen da guenta ,  
Ha miret • sqiant ganeoc'h ,  
Me gavo guell Mestr eguedoc'h.

**FIN**

